

BUEZ
SANT CAURINTIN

ESCOP QUENTA HA PATRON

EUS A ESCOPTI QUERNE

**Tennet eus a Volan hac Argentré, eus a
vuesiou an Tadou Occidant, eus or prop
ancien, missel ha brevierou a Guerne,
Leon ha Naonet hac ar Scridou ancien**

GANT

An Tat Julian MANER

RELIGIUS EUS A GOMPAGNUNEZ JESUS.



E QUEMPER

E TY AR. DE KERANGAL, IMPRIMER AN ESCOPTI.

- 1870 -

D'AR GLORIUS

SANT CAURINTIN

Abostol, Escop kenta, ha Patron eus a Escopti Querne.

Glorius Sant Caurintin, o velet ez oc'h bet ur pell bras ancounac'het gant ho pobl, a so quer bras obliget da gaout sonch ac'hanoc'h, quemeret am eus hardisdet da sisqueuz dezàn an obligation en deus doc'h enori, trugarecat, caret ha pidi. Guechal un den yaouanc mut o velet ez oa offancet e dat gant un den fall, a deuas souden da brezec ha crial. Me pегuement bennac ne doun quet dign da veza galvet ho map, o velet ez oc'h bet ur pell bras dileset hac ancounec'het, pегuement bennac ma visen bet mut pell amzer hep gouzout al langach eus ar c'hartermàn, cousgoude o velet ez oc'h bet ancounec'het gant ho re, n'em eus quet gallet miret na zisquessen d'ho tenvet quæs o dallidiguez tremenet hac an obligation o deus guitibunan da gaout sonch ac'hanoc'h, o lacat dirac o drem ho puez hac ar fatigou hoc'h eus anduret da blanta ar feiz en escopti Querne. Pliget gueneoc'h enori gant ho penediction al labour eus ho servicher indign a gare ober davantaich, ha disques an obligation en deus d'ho carantez hac ar c'hoant en deus da grisqui ho cloar hac enor, sicour ho pugale elec'h m'hoc'h eus bet anduret quement a boaniou da c'hounit an eneou da Zoue. Recevit ar presantou-màn a offràn deoc'h dre an daouarn eus ar Verc'hez glorius Vari, Sant Joseph e c'honducteur, sant Anton ho mignon bras, ha sant Primel ho compagnon santel, en ur pedi ho carantez ma pligeo ganti rei ho penediction voar ar volonte am eus da asten ho cloar, oc'h heul an exemplou santel hoc'h eus bet roet deomp oll guitibunan en ho puez binniguet. Chetu ar pez a esper gant ho sicour.

Ho Servicher indign, JULIAN MANER.

BUEZ SANT CAURINTIN

ABOSTOL, ESCOP QUENTA

Ha Patron eus a Escopti Querne.

Cbelaouet, va C'hernevis, discleria a fell din
Ar vuez miraculus ho tad sant Caurintin,
A zeuas e Breiz-Izel dre ordrenanç Doue
Da vesa escop quenta ha patron a Guerne.

Aberz hon autrou Doue e oa seiz sant e Breiz,
Seiz abostol admirabl evit planta ar feiz,
Gant ar speret glàn ez oa o c'halon alumet,
Gant c'hoant da gonvertissa ma c'halsent an oll bed.

Etreso oa admirabl hon tad sant Caurintin,
Dre e viraclou estranch hac e vuez divin.
Inspirit din, speret glàn, ma hilin danevel
E oberiou excellant hac e vuez santel.

An autrou sant Caurintin en Islandr oa ganet,
E dat hac e vam oa nobl ha tud honest meurbet ;
Dougeanç Doue en devoa an eil hac eguile,
Rac se e roesont ho map Caurintin da Zoue.

Pa zeuas ar squiant dezàn e voa cacet d'ar scol,
Pellec'h e trec'has souden e compagnunet oll :
Ha gant ar guir spered glàn o veza inspiret,
E seblante a neuse un den coz ha parfet.

Pa achuas e studiou, un devez o songeal
E tremen ar gloar monden hac an traezou all,
Adeo madou, emezàn, adeo bet milliguet,
Ne c'hoantàn netra nemet ma Jesus biniguet.

An oll pinvidiguezou a so fallagriez.
Hac ar garantez ar bed ur guir traïtoure,
O velet Jesus map Doue astennet el Lamgroas,
Ret eo ober pinigen ha dougen ar groas.

Pa lavaras evellen, gant guir affection,
E requetas ous e dat e venediction,
Pe gant hini consolet ez eas en han Doue,
Commanç en un hermitach pinigen nos ha de.

Gant bara ha dour aliez a youll mat e yune,
O tesirout dreist pep tra heul Jesus map Doue,
Het an deis oll e chomme oc'h ober oræson,
Pe en hini e leque e gonsolation.

Custum oa songeal bemdez ebars en e speret,
Er vuez sacr ha divin hor salver biniguet ;
Dreist pep tra tout oa scrifet ebars en e galon
Ar pemp gouli hor Salver hac e oll bassion.

Ebars en e biniti e pede evellen,
Roït din, va autrou an eur da ober pinigen,
Ma hillin hivisiquen anduri poaniou bras,
Oc'h eva en hoc'h hanaf, o tougen ho croas.

Allas, va Salver Jesus, ô va mignon fidel !
Peur hillin-me evidoc'h gouzan bete mervel ?
Roet hoc heus el Lamgroas, evidon pec'her quez,
Ho coat sacr ha precius, hac ouspen ho puez.

Neuse o velet an dut e pep heur ha moment
O vont da goll e pep lec'h, sioas gant mil pec'het,
Gant truez outo ez eas da bresec ha quelen
Ar bec'herien, ma rasant a galon pinigen.

Hoguen gant cals a dut cris e oa persecutet,
Hanvet sorcer ha laër, ha violer ar merc'het
Ne baouese cousgoude, pemdeiz e prezegue,
Oc'h alia peb unan amanti he vuhe.

Ha sulvui e presegue ar mignon da Zoue,
Sul brassoc'h voe tourmantet gant an dut cruel-se,
Gant birou oa poursuet ha gant ferrier houarnet,
Abalamour ma tesque an hent da vesa salvet.

Pa en em velas e tail da vesa massacret,
Rac aon na vise quiriec eus ur quer bras torfet,

Dre inspiration divin e teuas e Breis-Isel,
Da zisqui d'ar Vretonet an hent celestiel.

Pa oa deut er c'harter-màn ha guelet cals a dut
Pere a oa ignorant eguis al loenet mut,
E commanças da bresec ha disqueues deiz ha nos
Da bep re an hent eon da vont d'ar Barados.

Quercouls e oa tourmantet e Breis evel ar vro,
Dre abec ma tisclerie ar virione ato ;
Hanvet oa fallacr, sorcer, traitour, affronter,
Divroet, magician, sorc'henner ha truffer.

Evit an oll injuriou ne respont quen deso
Nemet : ma bugale quer, Doue t'ho pardonno,
Goudese var e zaoulin e pedi ô va Jesus !
O fardonnit en enor d'ho maro truesus.

Pa velfont e zouçder bras hac e batiantet
Ne baouesas cousgoude, ô christen diremet !
Oc'h e visaich e strincsont fanc a cals a viltançour,
O cridi eren e deaut ha serra e c'henou.

Ne dave bar evit-se, bemdeiz e presegue,
O clasq rei guir sclerijen d'ar bec'herien dallet ;
Hoguen an dut divergont, elec'h senti ounta,
E crocsont en e golier, e sanchont varneza.

Gant querden e voa ereet eguis un torfetour,
Goepeet ha tretet ganto eguis un traïtour ;
Neuse o veuli Doue gant eur visaich laouen,
E requete anduri ouspen mar boa moyen.

O vesa erfin tennet dre bermission Doue,
Diouz ar griffou cruel eus an oll bleizi-se,
Da gaout peoc'h ez eas da guichen Mene-C'hom,
En un ermitaich ha pell dious an dut divergont.

Ho peset sonch, Caurintin, hoc'h eus bet requetet
Douguen bepret ar groas hor Salver biniguet,
Elec'h ma zeot e veso ouz hoc'h heul ar groas,
Quemeret courach eta, preparet ho tiouscoas.

Pa commanças da bidi e creis e biniti,
E teuas an Ærouant evit e dourmanti ;
Un nosvez e lavaras, den fal ha divalo,
Mar ez cavan mui aman, hep mar me as laso.

An den santel a chommas enep an diaoulou,
Ferm eguis ur garrec cre scoet gant aveliou,
Lacat a ras e Jesus bepret e esperanç,
Rac ne alle caout morse e lec'h all assuranc.

An Ærouant o velet e chomme ferm ha cre
Hep caout aon ebet rac ar goudrousou-se,
En em lacas eguis chaç, bleizi ha leonet,
O clasq e sponta estlam hogos bep nos ganet.

Un nosvez gant gounar bras ganto e voa tiset,
A dal an eil penn sioas bete eguile cannet,
Friquet tout ha dispennet en heur-se dilavar,
Evel un den maro mic e couesas d'an douar.

Pa zisemplas, Jesus-Christ apparissa desa,
Han en mont da lavaret : pelec'h oac'h-hu bremâ?
Hoc'h adversourien siouas a garre ma lasa,
Dispennet oun tout ganto, pelec'h oac'h-hu brema?

Nebaon, ma map fidel, Caurintin, nebaoun,
O velet oc'h oll poaniou tost ousoc'h ez edoun,
Permetet emeus breman hoc'h anquen ha tourmant,
Evit an enor Doue ha mez d'an ærouant.

Er c'harter-se e chomas enep an erezvent,
O tesirout anduri bepret eguis diagent,
Pell oa diouz an dut monden songeal deis ha nos
Er joa bras so preparet ebars ar Barados.

Aviziou e visite an autrou sant Primel,
Evit parlant assambles eus an traou celestiel,
O velet oa dibourve a zour e gompagnon,
O planta e vas en douar e sortias ur feunteun.

En e ermitach e oa dibourve a pep tra,
Hoguen e pligeas da Zoue caout truez ounta,
Queit ha ma chomas eno, evit e sustanti,
Ur miracl bras a eure ebars e biniti.

En e feunteun e lacas ur pesquic admirabl,
Ha dreisa e tisquesas e buissanç adorabl ;
Bemdeis ur pez anezàn a drouc'he Caurintin,
Hac antronoz er c have dinoas hac anterin.

Sant Patern ha Sant Malo a zeuas d'e visita,
Dre'r brut eus ar miraclou a re Doue dreiza,

Hac evit o sustanti e pligeas d'hon autrou
Caç e feuteun Caurintin nombr bras a siliou.

Pa edo o chasseal un deis ar roue Grallon,
E dut a gavas ar sant oc'h ober oræson,
Hac int mont da lavaret : Caurintin den Doue ;
Petra allot-hu da rei da leina d'ar Roue ?

Deomp d'ar funteun, emeza, Doue en deus preparet
D'ar roue Grallon ha de dut ur bouet estranç meurhet
Neusa e troc'has ur pez eus ar pesquic beo,
Hac evit osa o lein ne roas quen dezo.

Hac int monet da c'hoarsin, d'ober goab aneza,
Rac ar pez a fournisse ne seblante netra :
Dalet, dalet, emezàn, ha gant quen neubeut-se
Gant graç Doue e leino e oll dut hac ar Roue.

Hac int monet da guemer an anter ar pesquic ;
Ha goudese e virvi ebars en ur billic.
O puissanç bras d'hon autrou ! e oll dut hac ar Roue
Hep netra quen a oue bet sustantet er pret-se.

Pa gonsideras Grallon en ur miracl quer bras,
C'hoant en devoa da velet ar pesquic a danvas,
Mont a eure d'ar feuteun ha dinoas er c'havas,
O redec ha diredec, ar pez en estonas.

Hogon goudese e teuas a bers an drouc-speret,
Ul laer hac a drouc'has ar pesquic binniguet,
O laëronci cruel ! a c'houdevez nicun
N'er velas mui o redec ebars en e feunteun.

An oll querent d'an den fall a oa disenoret,
Goapeet estranch ha casseet, scandalet, milliguet,
Abalamour d'an torfet en devoa bet privet
Breis eus ur miracl quer bras hac ar sant eus e vouet.

Rac-se gant un drouc-estranç ha cassoni ounta
E clasquent pis an amzer evit e estropia.
Pelec'h ez eot-hu bremàn, den Doue affliget,
Tourmantet oc'h e pep lec'h, e pep heur ha momet.

Pa ouezas an intantion emeus an dud cruel,
E quittas e ermitach hac an oll Breiz-Izel ;
E quittas e ermitach hac an oll Breis-Isel,
O tistrei c'hoas en Islandr da brezec an Aviel.

E nebeut eus a amser elec'h ma prezegue,
Cals a dut a zistroas, a drugare Doue,
Ar re veve gueichall eguis anevalet,
O lacas oll da veva eguis religiuset.

Hoguen an ærouant criz, o velet e leque
Cals a dut rust ha barbar da chench o goal buhe,
Ne allas e nep fæçon e anduri eno,
Ne c'hoante netra nemet e goll hac e varo.

Rac-se en em servichas eus an dut debauchet,
A boursuivas Caurintin a brezegue beporet ;
Hanvet oa ganto sorcer, affronter, disquiantet
Traïtour, clasquer cacous, den fall ha milliguet.

Gant armou ha ferrier houarn clasquet oa adarre,
Gant tut barbar ha cruel emeus ar c'harter-se :
Rac aoun ne vise quirriec e hunan d'e varo.
Evit an eil gueich sioas e tec'has dious e vro.

Neuse e teuas sonch deza e tec'has dious e vro
Ar mabic Jesus clasquet da lacat d'ar maro ;
O veza henvel ounta, e sant en e galon
Ur bligeadur admirabl ha consolation.

Dre abec ma care bras Jesus salver ar bet,
Hac ar Verc'hes binniguet, ha Joseph e friet ;
En Egypt prest e tec'has eleac'h ma voa cacet
Jesus hac e vam Mari gant Joseph e vaguer.

Da guenta ez eas da Rom pelec'h e saludas
Beziou'ar merzerien gant devotion bras,
Goude da Jerusalem ez eas en han Doue
Da visita ar plaçou santel eus ar guer-se.

Pa saludas gant daëlou ha guir devotion
Ar plaçou ma anduras Jesus e bassion,
D'an Egypt eon e tennas evit beza cuset
Eleac'h ma en em gusas hor Salver biniguet.

Er c'harter-se ez edo neuse un den santel,
Beza ez oa sant Anton devot eguis un æl,
Inspiret oa gant Doue monet d'e visita,
D'ar fin ma alze guelet ar vertus aneza.

Ar glorius sant Anton pa velas Caurintin,
E vodesti angelic hac e vuez divin,

*

E vodesti angelic hac e vuez divin,
E saludas humblamant stouet voar e zaoulin.

Caurintin a lavaras da sant Anton :
N'ouffe mui netra brema souheti va c'halon
Possedi a ràn hirio an enord da velet
Ma zat pehini em boa pell amzer desiret.

Gant sant Anton e chomas autrou sant Caurintin
Da velet e vertuïou hac e vuez divin ;
Pa sellas ous e vertus ez oa avis deza
N'en devoa bete neuse cassimant gret netra.

Ha pa velas e tesque deis ha nos constamant
Da gals a religiuset beva santelamant,
Youl en devoa da zisqui ebars e Breis-Isel,
Da gals cundui evelse ur vuez celestiel.

Rac-se e quimiadas dioc'h e dat sant Anton,
O c'houlen var e zaoulin e venediction,
Pe gant hini consolet ez eas en han Doue,
E Breis-Isel da c'hounit eneou da Zoue.

Arruet er c'harter-màn, gant e gomsou santel
Cals a dut a allias ar bed fall dilesel,
Hac int mont neuse ganta e creis ar forestou
Evit servicha Doue en o ermitachou.

Neuse cals a dut yaouanq a guitas o zadou,
Cals a dut a lavaras adeo d'o oll madou,
Ar forestou oa chenchet en ur guir barados,
Pelec'h e velent Doue hep paoues deis ha nos.

Dreist peb-unan oa priset o zat sant Caurintin,
Dre abec d'e viraclou hac e vuez divin ;
Rac-se nobl ha lic a bedas ar roue
D'e c'houlen oc'h sant Martin evit escop Querne.

Pa velas ar roue Grallon ar miraclou estlam
A eure sant Caurintin gant e vuez divlam,
E scrivas da sant Martin evit e gonsacri
Escop demeus a Guerne, ne doa c'hoas escopti.

Gant Tudin ha Guenole ez eas an den Doue
Da visita sant Martin eus abers ar roue,
Da visita sant Martin eus abers ar roue,
Hep gousout netra morse emeus e volonte,

Pligeout a eure estranch d'an autrou sant Martin
Ar simplicité santel eus a sant Caurintin,
Gant e vir humilite ha furnez celestiel
E ravisse ar galon d'an arc'hescop santel.

Rac-se e oue quemeret gant autrou sant Martin
Da veza escop Querne autrou sant Caurintin,
Ar c'harg-se a refusas dre vir humilite,
Erfin e rancas senti ous hon autrou Doue.

Pa retornas da Guemper, ar bopl, ar bourc'hisien,
Ouspen an dut a justic hac an oll beleyen,
Dre ordrenanç ar roue a yeas da zialben
D'o escop santel a so squer d'an oll esquibien.

Oc'h antren en e ilis e eure oræson,
Hac e roas da Guemper e venediction,
E peb lec'h ez edo joa, e peb lec'h an denvet
A veule Doue o velet o fastor binniguet.

Goudese e consacras Tudin ha Guenole
Evit beza abbadet en escopti Querne,
Evit beza assistet da brezec an aviel,
Dre abec ma cunduent ur vuez celestiel.

O velet ez oa carguet gant un enor nevez,
En em santas obliget da veza voar evez,
Deis ha nos o tihun, o pidi hor Salver
Da gaç ar bleiz infernal pell diouz e zenvet quer.

An den Doue, evit besa castiset hac ancien,
Ne baouese couscoude da ober pinigen;
Bemdeis hogos e yune, ha gant queus hac anquen
E scuille cals a zaelou evit ar bec'herien.

Mont a re dre e Escopty da bresec ha quelen
Peb-re da garet Doue hac ober pinigen.
Pe en tra e anduras mil boan ha mil anquen,
O caout betec ar maro bepret adversourien.

Devotion bras en devoa bemdeis d'ar pemp Gouli
Oc'h alia peb-unan bemdeis d'o saludi;
Gant daelou e contemple deis ha nos ar bassion
A voe aboue bian scrifet en e galon.

Jesus e Væstr douç ha mat a brometas desa
E sicourse gant e c'hraç en e heur diveza.

Nep er pedse, abalamour d'ar guir devotion
En devoa bepret douguet d'e varo ha passion.

Carantez bras en devoa ouz ar Verc'hes Vari ;
D'e bopl e recommande besa devot desi,
O lavaret ordinal ne ell quet perissa
Nep so devot a galon d'an itron Varia.

Gant ur guir devotion bemdeis e salude
Ar poul-calon pricius a Vam sacr da Zoue,
Gant ur respet bras ive he leas a enore,
Ha guenou sacr he mabic a oa e garante.

Gant fisianç bras en devoa bepret recours outi,
E c'hemesas evit mam, hac en enor desi
An ilis-~~neur~~ a Guemper a lacas batisa
Tost d'ar maner a roas ar roue Grallon desa.

E-unan coz hac Escop e laboure bemdeis
O touguen mein, pri ha raz da sevel e ilis.
Quernevis, enoret bras eo hoc'h ilis arrouset
Gant ar c'huez sant Caurintin ho patron binniguët.

Pa gonsacras e ilis d'an itron Varia,
Oc'h apparissa desa, e laras-hi desa :
Consacret hoc'heus, va map, em enor hoc'h ilis,
Din-me ha deoc'h e vezo consacret un deis.

Besa es oa advocat sourcius d'ar beorien,
Consolation d'ar re a yedo en anquen,
Pried d'an intanveset, tad d'an emzivadet,
Ur galon leun a druez d'ar re abandonet.

O vesa cresquet ar feis, hac enor Doue,
Gant e c'huez ha fatigou en escopty Querne,
E requete dioc'h Doue, o ouela deis ha nos,
Sortial eus ar bet màn ha mont d'ar Barados.

Ha pa selle ous an eè e comse evellen :
Donger am eus o vellet an oll traou terrien,
Sellit ousin va Jesus, va ene ne c'houl quen,
Ar bed-màn so prison din, ar vuez un anquen.

Evel ma red ur c'haro poursuvivet gant ar chaç
O clasc terri e sec'het gant ar feunteniou glas,
Evelse e clasc va ene paour, squis ha sec'hidic,
Jesus feunteun a vuez, ma zensor pinvidic.

Ous Jesus e c'houlenne besa e bassion
D'ar guener abalamour d'e varo ha passion
Hac ouspen e requete e vuez finissa
Da sadorn abalamour d'an itron Varia.

Erfin e pligeas da Zoue clevet e oræson
En devoa gret quellies gant guir affection,
Jesus e væstr douç ha mat a revelas desa
Ar momet pell desiret eus e heur divesa.

Ur guener e quemennas e religiuset,
Ar veleyen a Guemper hac ar chaloniet,
Hac y monet daveta, o veza estlamet
Petra falle aneso o escop binniguet.

Pa oant oll guitibunan en e d'y dastumet,
Evellen e presegas gant ur voez douç meurbet :
Adeo, ma bugale quer, adeo a lavaràn,
Ho tad a ya ; ar Verc'hes da vam deoc'h a lesàn.

Pa glefsont ar c'homsou-se gant queuz an estrancha
Peb unan neuse-souden a gammanças gouela :
Na ouelit evelse, na ouelit, emeza,
N'ho quittä dirac Doue nac an itron Varia.

M'ho ro da Zoue, da Zoue viot roet da viquen :
An eil quirit eguile, quirit Jesus hepquen,
Quirit ar Verc'hes Vari, mam d'an emzivadet,
Me ho les hirio etre he divrec'h biinniguet.

Scrifit e creis ho calon ar c'homsou diveza
A brononç ho tad deoc'h abars dispartia,
Mirit-y hivisiquen, mirit-constamant ;
Chetu ma oll heritach, chetu ma zestamant.

Goudese e vriatas autrou sant Caurintin
E vugale gant daelou stouet var e zaoulin,
E vouchas da bep-unan gant ur garante vras,
Pe en heur en e bassion souden e antreas.

An nemorant ar Guener e santas poaniou bras,
Ur c'hoant da sicour Jesus douguen e groas ;
En e c'henou, en e galon ez oa doun imprimet
Jesus, map Doue evidomp el Lamgroas astennet.

Betec an tronos ar sadorn e oa an den santel
En e bassion garo patiant eguis un æl :

En e necessite vras neuse oa visitet
Gant ar Verc'hes glorius mam d'an dud affliget.

Neuse o tostaat ountâ, ar vam douç d'an ælet
A zalc'has he faç etre he divrec'h biniguet,
Gant carantez vras ounta ha voar poul he c'halon
E laquas da reposi e ben hac e galon.

Allas ! Itron emeza, allas ! piou ez oun-me,
D'am guelet e elesse quen tost d'ho majeste ?
Hac hi dont da lavaret : ma map quer Caurintin,
Ho mam so deut davedoc'h, ma map, sellit ouzin.

Sus un neubeut c'hoas courach, rac ep retardamant
Jesus elec'h ho poaniou a raï deoc'h contantamant,
Jesus elec'h ho poaniou a raï deoc'h contantamant,
Ar Barados so digor, ha me a vezo presant.

Mam a druez, emeza, mam d'an emzivadet,
Me recommand da viquen d'ho truez ma denvet.
O va itron douç ha mat, mam glorius da Zoue,
Me les etre ho tivrec'h va escopti Querne.

Pa lavaras evellen, an ælez a ganas,
O teport e dremenvan gant contantamant bras ;
Ha neuze hep poan ebet e rentas ene,
Ebenn voar poul-calon eus ar vam da Zoue.

Glorius Sant Caurintin, mignon bras da Zoue.
D'ho pobl bezit alvocad dirac e vajeste :
Ho tenvet quez sicouret d'ho trugarez ato,
En o necessite bras hac en heur hor maro.

Neuse e ene santel etouez cals a ælet
Gant ar Verc'hes sacr a voe d'ar Barados cacet,
Ha presantet dre he dorn d'an drindet biniguet.
Da veza etouez ar sænt gant gloar curunet.

Sus eta, pobl a Guerne, dihunet, dihunet,
Sant Caurintin ur pell bras hon eus siouas leset,
Sant Cauridtin ur pell bras hon eus siouas leset,
Goulennomp bremàn ountàn pardon eus hor pec'het.

Greomp guell pelloc'h evit an amser tremenet,
Pedomp-èn d'hon asista, prest eo d'hon oll clevet ;
Hor buez, va c'hernevis, cenchomp hivisiquen,
Hac evit pligeout d'hon tad greomp oll guir pinigen.

MIRACLOU SANT CAURINTIN.

Cals a viraclou eure Sant Caurintin goude e varo, cals a dud clàn, bousar, dall ha cam a so bet guelleet dre veritou hac intercession o visita e ilis santel. Etre cals anezo e tisclerian un darn da c'hloar Doue hac e servicher fidel.

Un demezel goude ma voe sicouret gant sant Caurintin a gouestlas deza un dorn coar. Pa voe equichen an auter eus ar sant evit presanti he vœu, a oue tentet da viret ar pezh he devoa prometet hac e sentas ous an diaoul. Ne chomas pell hep punition, rac e santas neuse he dore o serra clos ; pa oa distroet d'he zi e pedas sant Caurintin evit ma pliche ganta e sicour, hac e c'houlennas pardon diounta. Un nosvez pa edo o pedi Doue, sant Caurintin apparissas dezi hac a lavaras : Ma merc'h, pa hoc'heus goueslet un dra benac da Zoue pe da ur re eus ar saent, besit fidel ha dalc'hit ho promessou, iit varc'hoas d'am ilis ha pidit Doue var ma bez gant ur guir esperanc hac e viot guelleet eno. Antronos ez eas an demesel da bidi var ar bez eus he fatron pelec'h e teus da gousquet, ha neuse souden e apparissas sant Caurintin dezi, a lavaras ez oa pare, hac hi pa voa dihun, en em santas yac'h ha franc a bep drouc, hac e veulas Doue hac e sant Binniget.

Tut fall ha divalo a antreas un deis en un ty eus un den honest meurbet, hac int mont d'e anfermi en un arc'h en intantion d'e lesel da vervel gant naon : pa en em velas er stad se recours en devoa oc'h sant Caurintin, hac er pedas evellen : autrou sant Caurintin binniguet, tat d'ar re affliget, sellit ouzin dre ho truez, me gred ferm ez oc'h douc ha mat, me gred ne refuso Doue netra eus ar pezh a c'houlennot digant e vajeste ; neuse souden apparissas sant Caurintin er gambr, leun a selerigen, a

ziale'hueas an ar h gant ar penn eus e groc hac e tennas ar paour quæs dious e brison. Pa oue delivret er fæçon-se, en em strincas e treit ar sant d'e drugarecat, goudese ez eas d'an ilis da drugarecat Doue hac e servicher sant Caurintin.

Allan Cagnard comt a Guerne a oa abandonet gant ar medecinet, hag ez oa e peril da veza dall abalamour d'un defluxion a gouese var e zaoulagat ; aliet oue gant e briet Judith merc'h da Judicael comt a Naonet d'en em reommandi da Sant Caurintin, senti a eure outi, hac e prometas rei d'an ilis sant Caurintin douarou, ma pliche ganta e sicour. Mont a eure da Gemper-Caurintin da visita an ilis bras hac a lacas voar an auter ur c'hontrat, pe dre hini e promette douarou hac heritachou da sant Caurintin, neuse souden en em santas pare, hac e trugarecas Doue ha sant Caurintin

Er bloas 1638 e quichen Quemper-Caurintin er ru Nevez oue cometet ur sacrilech enep sant Caurintin ; an imaich a oa er feunteun nevez a oue torret ha flastret gant ur re tentet gant an drouc-speret. Doue ne les quet ordinal ar pec'hedou bras-se hep punition public' : neuse souden e oue castiset Quemper abalamour d'an torfet-se ; ur vocen estranch a grogas da guenta ebars er ru Nevez elec'h ma oue cometet ar pec'het bras-se, ha goudese e lammas e quer pelec'h e lasas quasimant an drederen eus an habitantet, hac an memorant a voa e peril da berissa. Ur certen servicher da Zoue, o velet ez oa ar guer en ur quer bras danger, a oue inspiret da allia ar bourc'hisien d'en em reommandi da sant Caurintin dre ma zeo ar c'henta escop a Guemper ha patron a Guerne. Pep-unan a oue contant, senti a resont ous ar c'honsail fur-se, hac e resont vœu penaus e laquasent ober ul lec'h manific, an ilis sant Caurintin evit lacat e relegou, pere a yoa bet digacet gant an tat reverendissim den Doue Guilerm ar bælec escop a Guerne. Pa oue gret ar vœu, neuse souden e paou-

esas ar pestilanç , hac e finissas er ru Nevez elec'h ma commanças an drouc hac an occasion eus anesa. Doue ra veso meulet ha sant Caurintin.

An ilisatedral ens a Quemper a oue consacret da guenta gant sant Caurintin en enor d'ar Verc'hes Vari, hoguen goude ar maro eus aneza abalamour da gals a viraclou a re Doue dre an intercession eus e servicher santel, ar memes ilis a oue consacret en enor da sant Courintin, achoudevez e oue un devotion estranch d'ar sant-se. Eus an oll Vreis, eus a Vro-Saus, eus a Franç e teue cals a belerinet da visita e ilis, ha rac-se e oue gret un nombr bras a auteriu abalamour d'ar veleyen a zeue di a bep-tu. Voar an auter vras ez edo imaich an itron Varia hac hini sant Caurintin quichen e quichen.

Cenchet eus breman a blac da imaich sant Caurintin ar peza laca cals a dud d'en em estoni ha da c'houlen perac n'ema quiet e imaich voar an auter vras pa zeo ar patron eus an ilisatedral? Ebars en ilisatedral a Guemper ez oa ur chaloni santel Jacques Denis a rer aneza, ur guir den Doue hac affectionet bras ha devot da sant Caurintin. Pa edo un deis ouz e bidi dirac e imaich a voa var an auter vras, sant Caurintin a apparissas deza hac a lavaras : Denis ma map, grit abers Jesus ar peza livirin deo'ch brema : transportit ma imaich ha liquit-y var an auter tosta d'ar c'hœur d'ar c'hostez cleiz, rac ne d'è quiet ræson guelet en ur memes plaç ar vestres hac ar servicher. (Ar sant-se a zesiras disques e humilite goude e varo hac ar respect en deus en andret ar Verc'hes glorijs Vari). Senti a eure an den santel d'edat binniget, hac e laca e imaich elec'h ma idi brema ; ac'houdevez e crescas mui-ouz-vui an devotion eus ar chaloni santel d'e batron, carantesus oa ous ar beorien En e glenvet divesa e fallas desa besa caset da hospital sant Anton da vervel etoues ar beorien a gare eguis ar memprou Jesus-Chaist ; pa oa clàn estranch e teuas d'an hospital en e gambr un

den en devoa ar façon eus ur medecin, hac èn mont da goms oontan evellen : perac, outrou, o veza chaloni eus a Guemper ha pinvidic, perac e chomit-bu evelse etoues ar beorien quæs ebars en un hospital? Neuse e respontas, autrou, darn eus ma oll madou a apparchant ous ar beorien, racse ræson eo chomgant ma heritourien. Ha c’hui o teur, a lavar eguile, recouvri ho yec’het, medecinerezou excellant ameus? Jesus, emeza, Jesus a so medecin, Jesus a so medecinerez, ne fell din netra quen. Ha c’hui a gare da viana clevet ar c’huez eus ma medecinerezou? Constant oun, emeza. E vantel a zigoras eguile, ha neuze souden daou æl guen can a nigeas betec enna, hac èn mont da lavaret, allas, piou oun-me evit beza visitet ganeoc’h! Neuse en em disquesas an hini a gomse ounta. Me a so, emeza, ar medecin hoc’heus desiret, me a so Jesus a Nazareth, quemerit couraich un neubeut c’hoas, e teuot davedoun de receo ar recompanç eus ho carantez ha fatigou. Pa disparissas hor Salver, e teuas sant Caurintin en e gambr de visita pehini er c’housolas o rei e venediction desa; erfin pa oue dare da vervel en em disquesas desa, ar Verç’hes glorius Vari, o terc’hel etre he daouarn he map Jesus gant ur visaich laouen e roas consolation d’e servicher Denis. Quemerit couraich, emezi ma map Denis, chetu ma map am eus digacet davedoc’h, quemerit-èn etre ho tivrec’h; neuse an den santel-se a guemeras eguis sant Simeon, hor Salver binniguet Jesus etre e zivrec’h ha goudese e rentas ene santel etouez cals a æles, etre daouarn Jesus hac e Vam glorius. Ac’han ez eo hanat peguer profitabl eo da un den besa devot da sant Caurintin, pa sicour e vignonet ahèt o buez en o necessite bras, hadreist pep tra en articl ar maro, ous recommandi da Jesus hor barner, ha da itron Varia a druez. Quemerit eta couraich, Quernevis, querit, trugarecaït, pedit, enorit a galon vad ho patron hac ho tat sant Caurintin. Querit gantà ar Verç’hez glorius

Vari a oua mignones bras dezhaù ; n'ancouec'het
quet sant Joseph. dreist pep-tra tout quirit Jesus
map Doue , scrit e creis ho calon Jesus , Mari,
Joseph, sant Caurintin, hac en ho maro e viot gantâ
sicouret da silvidiguez hoc'h ene.

CANTIC SPIRITUEL

*Euz ar garantez admirabl a zisquezas sant Cau-
rintin e quenver un den yaouanc a oue chasseet
gant e dat hac e vam, enep guir ha rason.*

Celaouit guitibunàn , discleria a fell din ,
Ar garantez excellant eus a sant Caurintin ,
Ar garantez excellant eus a sant Caurintin ,
En andret un den yaouanc a Gemper Caurintin.

Pa edo escop Querne Bertrand a Rosmadec ,
Den carantezus meurbet , devot ha trugarec ,
Neuse e Quemper ez oa un digentil cruel ,
Abalamour d'e guerent ne feller quet e henvel.

Enep pep guir ha rason gant ur galon ingrat ,
E quemeras cassoni ous e vap douç ha mat .
Hep gallout e nep façon e velet na cleuet ,
Na permetti en he di , gant drouc ne alle quet.

Un devez gant maliç bras e lavaras d'e briet
Ma friet , ne baten quet gant hor map milliguet ,
Ma friet , ne baten quet gant hor map milliguet ;
Caçomp-èn pell diouzomp , ne allàn e garet.

An itron evit senti ous he friet dinvat ,
A yas timat da gaout he map a natur vat ,
Que ac'han ermes pell er c'harter ma quiri ,
Chede tregont scoët ase , naz quelen biquen mui .

Na lavar da zen ebet pa a di ez out savet ,
Rac aon na vesimp oll guenet disenoret ,

Rac acn na vesimp oll guenet disenoret,
Morse biquen ne tistroï bouet ar grouc milliguet.

Allas! ma mam, emesa, petra ameus-me gret?
Evit beza evelse eus ho ty chasseet;
Laquet em eus ma foan da servicha Doue,
Ha da senti ouzoc'h hac ouz ma zat bemde.

Que ac'han pell, menargas, pell ac'han, emezi,
Te a so an disenor emeus hon tieguez-ni,
Te a so an disenor emeus hon tieguez-ni,
Chede tregont scoet amàn, naz quelen biquen mui.

An digentil yaouanc-se o velet ez oa ret
Quittat prest en e zespët an ty ma oa ganet,
A yas gant esperanç bras dirac sant Caurintin,
En ur ouela e pedas evellen voar e zaoulin :

Glorius sant Caurintin, bremàn ez oun chasseet
Emes ho quer gant va zat am eus bepret caret;
M'ho quemer evit tat glorijs sant Caurintin,
Ma dalc'hit evit ho map, ma zat roit sicour din.

Pa lavaras evelse gant guir devotion,
E c'houlennas diganta e venediction,
Pe gant hini assuret ez eas en han Doue
Eus a Guemper Caurintin varzu Douarnenez.

Pa arruas voar ar menez o sellet voar e guis,
E quimidas adarre d'e guer ha d'e ilis,
Adeo ma zat, emezàn, adeo sant Caurintin,
Ho pezet souch ouz ho map, ho pezet truez ouzin.

Pa boursuivas, en e hent ur groas a rancontras,
En ur c'hostez voa peintet Jesus hor mæstr bras,
Hac en tu-all un imaich d'an itron Varia,
Hac eno voar e zaoulin e teuas da ouela.

Mam a druez, emezà, ô guerc'hes binniguet!
M'ho quemer evit ma mam, mam d'an emzin vadet,
M'ho quemer evit ma mam, mam d'an emzin vadet,
Mar deut d'am c'huitat brema, ne oun pelec'h monet.

Ma Salver leun a druez, chasseet oun gant ma zat,
Chetu ebars ho croas ur paour quæs emzin vadet.
M'ho quemer evit ma zat, tat d'an emzin vadet,
Mar deut d'am c'huitat brema, ne oun pelec'h monet.

Va autrou sant Caurintin, bezit conducteur din,
Esperanç am eus ennoc'h, sellit bepret ouzin.
Dioallit ato ma c'horf, dioallit ma ene,
Monet a ràn gueneoc'h breman en han Doue.

Goudese da ben ul leau ur guer a rancontras
Pelec'h e ouele ur vrac gant un nec'hamant bras ;
Neuse an den yaouanc-se gant truez bras outhi
A yeas timat daveti evit e c'honsoli.

Perac emezàn, maoues, perac e ouelit-hu ?
Livirit ho melconi, pe abec hoc'heus-hu ?
Allas ! me so guenoc'h a bep-tu affliget,
Hac rac-se am eus truez ouz an dut desolet.

Siouas, autrou, emezi, ma friet so maro,
Sebeliet eo, emesi, sioas din, tri de so,
Dre abec n'em eus netra ar person ne fell quet
Anterri e gorf brema en douar binniguet.

E creis ul liors din-me ur fos am eus toullet
Evit anterri erfin ar c'horf eus ma friet,
Hac ar pez a ràn ma c'halon, n'em eus sioas netra
Da lacat offerennou evit pidi ganta.

Neuse an den yaouanc-se a zeuas da ouela,
Dare oue gant un truez bras e galon da ranna :
Maoues, emezàn, maoues ; quemeret patiantet,
Hac esperet e Doue, n'ho tileso nepret.

Tat eo d'an emzinvalet ha d'an intanvezet,
Recommandet d'e druez ha c'hui hac ho priet ;
O vesa gant ma zat propr ermes Guemper chasseet,
E creis ma foaniou estlam em eus evelse gret.

Servichit pelloc'h Doue chetu tregont scoet
A roàn evit ma ellot enterri ho priet,
Ha gant an nemorant liquit pidi Doue
Evinta ha goudese maguet ho pugale.

O vesa tout roet ganta e hent a gontinuas,
Leun a fizianç e Doue hac a garantez vras ;
Petra reot-hu, den yaouanc, petra rent-hu brema ?
Roethoc'heus hoc'h oll madou, allas n'hoc'heus netra !

Nep a esper e Doue hac en itron Varia,
Birviquen n'en deveso ezom eus a netra,

Birviquen n'en deveso ezom eus a netra,
Mar edi en e c'halon hor Salver dreist pep-tra.

An den yaouanc truesus e hent a gontinuas,
Hac an nos er suprenas ebars en ur c'hoat bras,
Pelec'h e couscas en nos hep dibri nac efa,
Oc'h en em recommandi d'an itron Varia.

Pa savas mintin c'houlou e teuas daveta
Un itron caër, a oa ar Verc'hes Varia,
A c'houlennas diganta, petra a rit-hu ase ?
C'hui so martese laër, livirit franc dime.

Allas! itron, emesa, me so un emzinvat,
Chasseet oun sioas din-me gant ma mam ha ma zat,
Chasseet oun sioas din-me gant ma mam ha ma zat,
Rac-se ez oun bet contraign cousquet en nos er c'hoat

Pa gomse evelse, chetu sant Caurintin,
O tont eguis an escop a Guemper Caurintin,
Petra, emesàn, den yaouanc, petra rit-hu ase ?
Perac tra hoc'hu deut er c'hoat quer mintin-se ?

Allas! autrou, emesàn, me so un emzinvat,
Chasseet oun sioas din-me gant ma mam ha ma zat,
Chasseet oun sioas din-me gant ma mam ha ma zat.
Rac-se ez oun bet contraign cousquet en nos er c'hoat.

Neuse an escop santel a lavaras deza,
Ho pet fisianç e Doue hac en itron Varia,
Ho pet fisianç e Doue hac en itron Varia,
E sant Caurintin ive ne vanco deoc'h netra.

Goude quemense e teuas da lavaret desa,
Chetu aount Lesascoet, ha c'hui oar servicha ?
Studiet em eus, emesa, me oar erfat scrifa
Me a so undigentil, ne oun quet servicha.

Erfin e oue conduet neuse da Lesascoet,
Ma c'hallisont an autrou ganta diguemeret
An den yaouanç honest-se da zisqui da scrifa,
Ar verc'h ne devoa quet mæstr pell amser a voa.

Disquez a eure eno ur guir devotion,
Peb honestis ha douçder e pep leac'h ha fæçon,
Ur carantez admirabl, ouz Jesus fisianç
Hac ouz an itron Varia gant ur guir esperanç.

Gant e oll exemplou mat e tennas ar galon
D'an Digentil a laras un devez d'an itron :
Ma friet, var ma c'halon pell-so em eus un dra,
Hoguen ne gredis biscoas deoc'h-hu e ziscleria.

Livirit franc, livirit, emesi an itron,
Pe seurt abec hoc'heus-hu da guz din ho calon,
Pe seurt abec hoc'heus-hu da guz din ho calon,
En em guz evalesse an d'è quet direson ?

Me gare sur, ma friet, me gare emeza,
Dimisi ouz he mæstr mat hor merc'h Caurintina,
Dimisi ouz he mæstr mat hor merc'h Caurintina,
Dre ma zeo un den honest a gar Doue drist pep-tra.

Doue ra veso binniguet, a lavar an itron.
Pell amser so ab em eus an youl-se em c'halon,
Pell amser so ab em eus an youl-se em c'halon,
Hoguen d'e ziscleria deoc'h nem boa an hardison.

Ouz o merc'h e c'houlensont hac-hi a fell desi
E guemer evit priet ha mæstr eus anesi?
Ra veso gret, emesi, bepret ho volonte,
Na zesiran netra quen nemet ho volonte.

He c'herent a oa contant nemet un eontr desi
A guemeras evit-se maliç ha cassoni;
Hoguen en despet desa hac evit gloar Doue
An dimisi a oue gret an eil ouz eguile.

Da ben ur bloas pe var dro, an eontr arraget
O velet ez oa brases e Nises binniguet,
A glasque bepret e laç evit en em vengi,
Gant maliç bras en devoa ouz he friet anesi.

Un devez an traitour d'e Nis a lavaras,
Ha c'hui ho teur chasseal equichen ar mor glas
Chetu an amzer caër ha propr da c'hadona,
Deut guenen, ma migon, d'ar parcou tosta.

Pa ouent tosteet ouz ar mor an eontr fall a strincsas
E nis e creis ar mor, ô traitourez bras!
O counar eusic ha cris emeus ar gassoni!
Pebez crueldet, autrou, pebez ingrateri!

Pa gouezas an den yaouanc e teuas da lenva,
Va autrou sant Cauritin, ma sicouret brema,

Va autrou sant Caurintin, ma sicouret brema,
Ha c'hui Jesus ma mæstr quer, ha c'hui itron Varia.

Eürus eo nep a laca e Doue e esperanç,
E creis ar perillou bras en devezs assuranç,
Soutenet oue gant un dra digentil quæz-se,
Dreist an ouageou eus ar mor, ô pebez surente !

Quen na vise pell amser e oue ar paour quez
Conduet en un enez e quichen Douarnenez,
Pelec'h ne gavas siouas nep consolation,
Nemet Doue a chomme bepret en e galon.

O vesa evelse e creis ar mor leset,
Hep guelet nicun er bed, a bep-tu affliget,
O ma zat quer, emesa, gloriüs sant Caurintin
Chetu ho map desolet, na zistroit diousin.

O carantez admirabl eus a sant Caurintin !
A zigaças d'e vap quer bep nos ha bep mintin
A zigaças d'e vap quer bep nos ha bep mintin
Ur boet precius a het pemp bloas anterin.

Ouspen a het queit-se an itron Varia
A zigaças dre un æl bep nos ganet desa
Ur pilet caër meurbet evit e consoli.

O trugarez da vesa meulet gueneomp-ni !

Pa oue pemp bloas tremenet e creis en Enesen,
Sant Caurintin a laras d'e vignon evellen :
Evit ar veich diveza e roàn deoc'h da leina,
D'an nos quenta e rencot en ho ty coania.

D'ar fin ar bælec santel adeo a lavaras,
Hac èn monet da ouela gant queus ha glac'har bras,
Adeo ma zat emeza, adeo tad binniguet,
Mil gueich ho trugarecàn, peur illin-me ho quelet ?

Da ben teir heur var dro un den coz a zeuas,
A guerse var ar mor eguis var an douar bras,
Hac èn mont da lavaret, petra roet-hu dime,
Ha gant sicour Jesus-Christ m'ho tenno alesse ?

Me bromet emeza da Zoue ha dechu, va mignon,
Va maner ha ma madou gant guir devotion,
Pemp bloas so siouas dime ne velis ma friet,
Hep consolation nemet gant Jesus binniguet.

Re a bromettet din, emesa, va autrou,
Ne c'hoantàn netra nemet an anter ho madou ;
En em strinquit var ma c'hein ha gant sicour Doue,
M'ho lacaï abars an nos en aud e surente.

Abars ma oa pell amser e oue counduet
Bete an dut en devoa pell amser desiret,
Quimiada a eure desa an den coz o lavaret,
Adeo, donet a rin sur un deis d'ho quelet.

Neuse an digentil-se daou baich a gavas,
Besa ez oant daou-æel, pere er c'honduas
Gant daou flambosen gaër rac eun en e dy,
Dre abec ne ouie mui an hent da vonet di.

Pa oue e quichen e di, neuse e tisparissas
An daou zen yaouanc-se, ar pez en estonas,
Antren a ra er maner en devoa desiret
Gant ar c'hoant estranch meurbet da velet e briet.

Abars antren ez edo e briet melconiet,
Oc'h en em glem evellen gant ur c'heus diremet :
Pelec'h emoc'h-hu sioas, ô ma friet fidel !
Mar be moyen d'ho quelet ur veich abars mervel.

Pa ouele hi evelse e antreas souden
He friet a c'houlenne bemdeis gant mil anquen,
O vont a ben red desa, ha c'hui eo ma friet,
Allas ! aon bras em oa rac na visaich collet.

Meulomp Doue, emezàn, en deus ma c'honservet,
E tail oun bet da vervel ahèt pemp bloas ganet ;
Me am eus lequet bepret ma fisianç e Doue
Pehini en deveus roet din guir sicour nos ha de.

Pa breseguent, e vabic a zeuas a ben red
Evit saludi e dat n'en devoa biscoas guelet,
O lamet ous e c'housoug, ma zat quer, emesa,
Retournet mat ra viot, meulomp Doue da genta.

Neuse souden e teuas an oll servicherien
Hac an dut-gentil tosta hac an ameseyen ;
E pep lec'h ez edo joa, e pep lec'h triumphou,
O velet ez edo distro en e di an autrou.

Hac hi goulen diganta pe elec'h ez oa bet ?
Doue ra veso, emesa, da virviquen meulet :

Doue ra veso, emesa, da virviquen meulet,
D'am besa ahèt pemp bloas diouz mil peril tennet.

Ma eontr en ur ober van d'am c'haç da chasseal,
Am strincas e creis ar mor, ha me mont da grial,
Guerc'hes gloriüs Vari, ha c'hui sant Caurintin,
Ho pet sonch eus ho map, ho pet truez ouzin ?

Souden e voan cunduet e creis un enesen
Gant un dra am soutene varar mor hep anquen,
Pemp bloas ur bælec santel en deus ma bisitet
Hac a bep-tra necesser hep fasia pourveet.

D'ar fin oun bet ac'hano gant un den coz tennet,
Rac-se anter ma madou am eus desàn gouestlet,
Rac-se anter ma madou am eus desàn gouestlet,
Evalesse oun quit, Doue ra veso meulet.

Neuse ar gompagnunez o velet quemense
A veulas argarantez a Jesus, map Doue ;
Goudese lies banquejou gant e oll mignonet ,
Abalamour d'an autrou a oa distroet.

Da ben ur bloaves voar dro an den coz a zeuas
Da c'houlèn ous an autrou ar govr a brometas,
Da c'houlèn ous an autrou ar govr a brometas,
Pa oue gant e sicour mat tennet dious mor glas.

Pa velas an digentil e lavaras desa,
Ha sonch hoc'heus-hu brema emeus ho promessa ?
Ha sonch hoc'heus-hu brema emeus ho promessa ?
Grit prest hac en ho chapel m'ho cortoï brema.

Digaç a eure affo an anter e vadou ;
Hoguen an den ancien-se a laras, va autrou,
Hoguen an den ancien-se a laras, va autrou,
Petra songit-hu, pelec'h ema ho promessaou ?

Ma zat, chetu emesa, an anter ma madou,
Ne guzàn netra, emaint tout dirazoc'h, va autrou ?
Ne guzàn netra, emaint tout dirazoc'h, va autrou,
Guel vihe din besa lazet gant an ancou.

Ur mabic couantic hoc'heus, digacit-èn brema,
C'hoant bras em eus d'e velet abars dispartia,
C'hoant bras em eus d'e velet abars dispartia,
Dre m'am eus carantez bras ouzoc'h-hu hac ounta.

Pa voe cacet e vabic gant e vam daveta,
Autrou, anter ho madou hoc'heus gouestlet emesa,
Ho mabic eus ho madou a so al lot guella,
Ret eo eta derc'hel ho vœu, en daou bez e ranna.

Neuse souden an itron, petra it-hu da ober ?
Penaus lasa evelse ma mabic coant ha quer ?
Quent-se dalc'hit evita hon oll ties ha madou,
Pe mirit-èn en antier, m'ho suppli, va autrou.

Itron, emese; paouesit, na ouelit evelse,
Gouestlet en deus ho priet an anter da Zoue,
Abraham so bet dare da sacrificia e vap,
Evelse sentit oc'h Doue hac effit an hanap.

Pa achuas e gomzou ur gontel a dennas ;
Ar vam o sempla neuse, d'an douar a gouesas,
Ar vam o sempla neuse, d'an douar a gouesas,
Hac e friet o ouela gant un nec'hamant vras.

Pa edo prest da droc'ha un itron a antreas,
Ha var e lerc'h un escop gant ur majeste bras,
Paoues, emesan: den coz, rac hon autrou Doue
Ne c'houlen diganto nemet o volontez.

Pa zisemplas an itron, an escop a laras,
Iit un neubeut en ho cambr ha na zaliit pell bras,
List ho map hac ho priet comz outo a fell deomp,
Ha da ben un neubeudic distroet davedomp,

Goudese an itron vras d'an autrou a laras,
A c'hui am ene, autrou, sellit c'hoas ;
Allas ! ma excus a reot, ô itron enoret !
N'am boe biscoas em buez an enor d'ho quelet.

Ancouet hoc'heus-hu, emesi, e quemerc'zoc'h guei-
[chall.]

Mam Doue evit ho mam dreist ar santeset all ?
Me a so mam da Zoue e renquit hep gortos
C'hui hac ho mabic donet guenen d'ar Barados.

Neuse souden an escop a lavaras desa,
A c'hui am ene, autrou, livirit franc brema ;
Ma excusit emesa, va autrou enoret,
N'am boe biscoas em buez an enor d'ho quelet.

Ancounec'het hoc'h eus e quemerc'zoc'h gueichall,
Sant Caurintiu evit tad gant ur galon leal,

Me a so sant Caurintin, e renquet hep gortos
C'hui hac ho mabic donet guenen d'ar Barados.

Goudese an den ancien a lavaras desa,
A c'hui ene piou oun-me, disquesit din brema ?
Pardonit din, emesa, n'em eus quet an enor
D'ho pesa guelel biscoas nemet voar ar mor.

Me a so ar paour quæz-se hoc'heus bet sicouret,
Evit enterri ma c'horf gant ho tregont scoet,
Evit gobr ar garantez e renquit hep gortos
C'hui hac ho mabic donet guenen d'ar Barados.

An autrou hac e vabic pa glesfont quemense
E couessont maro an eil hac eguile,
Pelec'h gant S. Caurintin hac ar Verc'hes binniguet
Rac eon d'ar Barados e viont conduet.

Den yaouanc mil gueich eürus da vesa quemeret
Sant Caurintin evit tat, hec'heus bepret caret ;
Eürus oc'h en ho puez, eürus en ho maro,
Da vesa lequeat enna ho fisianç ato.

Da ben un nebeut goude an itron pa distroas,
He mabic gant he friet maro mic a gavas,
He mabic gant he friet maro mic a gavas,
O nec'hamant diremet ! ho tristidiguez bras !

Ne ouffe den discleria he c'heus ha melconi ;
Neuse souden e fazias e c'halon anezi,
Ne allas lavaret gric, var ar c'horf he mabic
E couesas sempl evel pa vise maro mic.

Pa zisemplas, sioas din, emezi.
Petra velan-me breman, Guerc'hes glorius Vari ?
Voar ho lerc'h ne fell din mui chom er bed-man beo,
Ma mabic ha ma friet a so eta maro.

Petra rin-me, autrou Doue, penaus e vevin-me,
Ma buez, ma c'halon so lamet digueneren :
Mam a druez binniguet, mam intanveset,
Sicouret ur baoures quæz intanves dileset.

En em gonsolit, itron, quemerit patiantet,
Ne ouelit evalesses, ar Verc'hes binniguet,
Ha sant Caurintin ivez gant æles binniguet
O devez douget ho map hac ho priet.

Da ben un neubeut goude pa oue enterret
Ebars en ur memes bez he map hac he friet,
O tisprisout ar bed màn hac e bombançou væn,
En em rentas leanes da ober pinigen.

Sus eta, Bretonnet quer, na vezit digalon,
Enoromp Sant Caurintin, pedomp-èn a galon ;
Nep a vezo er bed-màn car ha devot deza,
Sicouret e veso ganta en heur divesa.

Mar querit gouzout pelloc'h ar faëçon d'e bidi,
D'e servicha evit mat, caret hac enori,
Chelaouit ur vers nevez so nevez composet
Da enori hor patron hac hon tat binniguet.

Ar Voyen da enori Sant Caurintin.

O Speret-glàn ; inspirit din
Em c'halon evit ma hillin
Asten ar gloar sant Caurintin.

*Meulomp Doue, meulomp Jesus,
Meulomp Mari, meulomp Joseph,
Ha Joachim ha Caurintin.*

Clevit mat eta, Quernevis,
Bep bloas ur veich gant honestis
Et da visita hoc'h ilis.

Meulomp Doue.

Bep bloas yunit, mar credit din,
Ar vigil ho tad Caurintin,
Hac ho sicouro en ho fin.

Meulomp Doue.

Pep gouel Caurintin, Quernevis,
Cenchit hivisiquen ho quis,
Sacramantit en e ilis.

Meulomp Doue.

Ouspen e Quemper Caurintin,
Saludi gant devotion dign
An imaich douç sant Caurintin.

Meulomp Doue.

Pa idoc'h en affliction ;
Dirasa gant guir devotion
Adressit d'ho tat oræson.

Meulomp Doue.

Adressit desa ho vœuou,
Dre ma zeo ho tat hac hoc'h autrou,
En deus gret cals a viraclou. *Meulomp Doue.*

Desqui evit mat, christenien,
D'e enori ur guir moyen,
Roït d'ar paour an alusen. *Meulomp Doue.*

Consolit ar re desolet
Ouspen ar re glàn bisitet,
Gant ho tat vihot sicouret. *Meulomp Doue.*

Mar besit, christen, affliget,
Grit en e enor un naovet,
Hac un offeren dilasset. *Meulomp Doue.*

Mar fell deoc'h pligeout desa,
Quirit an itron Varia,
E deus carantez bras ounta. *Meulomp Doue.*

Seis ilis an itron Varia
Bisitit bep gouel Maria,
A so mignones bras desa. *Meulomp Doue.*

E peb ilis guitubunan
Livirit an oræson-màn
A dle da ousout pep unan. *Meulomp Doue.*

Pemp *Pater* offrit da Jesus
Gant ur galon devotius,
En enor d'e c'houliou precius. *Meulomp Doue.*

Hac en enor d'ar seiz clese
A vlessas ar vam da Zoue,
Seiz gueich ar *Pater* hac an *Ave*. *Meulomp Doue.*

Caromp oll a galon parfet
Sant Joseph pehini so bet
Maguer d'hor Salver binniguet. *Meulomp Doue.*

Sant Caurintin bep nos ha de
Er c'haras gant guir carante,
Ræson eo d'ober evelse. *Meulomp Doue.*

Livirit bemnos hep fasia,
Mar desirit pligeout desa,
Teir *Pater* hac *Ave Maria*. *Meulomp Doue.*

Da bella diousoc'h ur goal fin,
Livirit bemnos ha mintin.

En enor sant Caurintin.

Meulomp Doue.

Jesus, Mari, ha Joachim,
Joseph, Anna, ha Caurintin,
D'am zremenvam sellit ousin.

*Meulomp Doue, meulomp Jesus,
Meulomp Mari, meulomp Joseph.*

FIN.

